

PEDENN DA ZANT RONAN

Ton : *D'hor mamm Santez Anna.*

DISKAN :

*Sant Ronan, hor patron,
Ni ho ped a galon,
Mirit, enn han' Doue,
Hor c'horf hag hon ene !*

1.

*Kaër eo diouz ar mintin
Ar gliz er parkeier :
Kaër ho pennoz divin
Varnomp e peb amzer.*

2.

*Ar pinvidic, ar paour
Ama 'zo daoulinet :
Eleac'h danvez hag aour
D'ezho roit eürusted !*

3.

*Roit ive, 'vel guechall,
Yec'hed d'ar glanvourien !
Deuit ato d'hon diouall
Ouz ar vreac'h, ar voçen !*

4.

*Sellit er anor diroll
Hor c'herent enn danjer,
E m'aint o vont da goll :
Truez ! ô Tad tener !*

5.

*Bleizi 'zo bet gulet
Tro var dro d'ho lochenn :
Bleizi 'zo kounnaret
Ouzomp, ouz hor c'hredenn.*

6.

*Ann anevaled gouëz
Pell diouzoc'h a dec'he,
Hag ar bed didruez
Treac'h 've d'ho pugale.*

7.

*Nan, nan, rag ho kalon
Morse n'eo bet sklaset,
Nan, galloud hor patron
Morse ne vo bereet.*

8.

*Evit gloar oc'h hano
Diredit d'hor sicour.
Kasit pell diouz ho pro,
Kasit ann enebour !*

9.

*Ma n'hor selaout ket
Ni ielo d'ann daoulin,
'Vit en em glemm bepret,
Dirag sant Korintin.*

10.

*C'hoant hon deuz da veva
E skeud ho tiouaskell :
Chom hep ho servicha,
Kentoc'h mil guech mervel !*


11.

*Holl epad hor büe,
Ni ho pedo laouën,
Da c'headal mont dann ee,
D'ho meuli da viken.*

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 2 Juillet 1887.

A. SERRE,
Pro-Vicaire Capitulaire.



Quimper, Moulveran an Duedhentil.